

Kantikou Parrez Nevez.



KANTIK INTRON VARIA DREMOREN



Var don : Itron Varia ar Porzou.

DISKAN :

*Intron Varia Dremoren,
Klevit mouez ho pugale ;
Bezit ato hor stereden ;
Hon diouallit hoz ha de.*

Labourerien, martoloded
Da chapelik ar Veré'hez,
Laouén omp hirio diredet
Da bedi hor Rouanez.

Evel eul he c'houk biban
Red da gaout he vam dener,
En hon anken ni zeu buhan,
Mari, beteg hoc'h anter.

Vel ar c'haro en e zee'hed
A glask dour an eienen,
Ni, pa ve poaniet hor spered,
D'eoc'h-hui a ra eur beden.

Aman oc'h dindan tri hano
Gant hon tadou bet pedet,
Hantou ken dous d'ar genô
Ha gureomp kement karet !

Roit ho pennoz d'ar parkeier,
Evit ma vint frouezuz,
Ho pennoz ive d'hon tier
Ha bennet ho mab Jezuz.

C'hui voar, Mari, e zeo c'huero
D'al labourer kaout eost fall ;
Grit ma vo ad mad en ero
Glebet gant el huezan e dal.

Stereden ar mor oc'h hanvet,
Diouallit ar martolod,
Rag Jezuz en deuz he roet
D'hoc'h da zifenn vit ho lod.

Vanec'hun, breiz e vagik
Luskallet gant ar wagen,
Deuz ar nenv tolit eur zellik,
Astennit ho ren d'he ren.

Kasit pell, Intron a Druéz,
Ar goal amzer diouzomp ;
Amzer gaer vit ar beskerez
Harz ho troid a c'houlennomp.

Ra vo leun-tenn hor rouejou
Hag hor bag epad ar bla ;
Pa n eus naon hor hugaligou,
Red eo rei d'ezo bara.

Guere'hez Vari, ouzomp sellit
Pa zont kloc'h Tremoren,
Neuze buhan hor zikourit,
E vouez gas d'eoc'h hor peden.

Kemennit eta d'an avel
Ha d'ar gurunou spontuz
Euc'h ar mor e kounar tevel ;
Ho preac'h zo oll-c'hallouduz.

Ni ve laouen e kreiz ar mor,
Pa velomp tour hó chapel ;
Neuze ni gan en hoc'h henor
Eur c'hantik gant an avel.

En danjer ha tóst d'ar maro
Ni ho ped, ho ped kalet ;
Mar eo ho torn hon diouallo,
Biken ne vezimp kollet.

D'an-den dall roit ar sklerijen,
Intron Varia 'r Sklerded ;
'Vit-se dour feunteun Tremoren
Ganeoc'h zo bet benniget.

Ar Feiz hirio a dec'h buhan
Deuz hor bro ger Breiz-Izel ;
Eur vanden tud fall heb ehan
Ra d'ezi eur goal vrezel.

Grit ma vo stard evel guechall
Lezen Doue en hor c'hreiz ;
Heb d'ezi n'eus met noz tenval :
Kaer eo sklerijen ar Feiz !

O Mari, o mam a Druéz,
Mam a C'hraz hag a Sklerded,
Ebarz an nenv gant an elez
Roit d'eomp oll an eurzed.

N...

KANTIK ITRON VARIA AR MOR

Vav don Rumengol pe Beg ar Raz.

*Guerc'hez, Rouanez an Arvor,
Roit ho pennoz d'an dud a vor !
Pedit, pedit ho Mab Jezuz
Da veza ouzomp truezuz.*

Hor micher-ni a zo henvel
Ouz micher goz an Ebestel ;
Ni evelldho a rank poania
Er mor da c'honit hor bara.

Choazet hon euz eur goal labour ;
Nag a zanjeriou var an dour !
Mes gant ar Verc'hez benniget
En danjer e vimp diouallet.

Pa 'z omp tolet ha distolet
Dre nerz avelou dirollet,
Beillit varnomp, o Mamm dener,
Hon diouallit diouz ar reier.

Goulen a reomp ive, Guerc'hez,
Ma teui da vad ar beskerez,
Ma c'hellimp diyar hon labour,
Digas d'hon tud eun tamm sikour.

'Vit plijout d'ho kalon a vamm,
Ni ho pugale vo divlamm ;
En hon touez grit ne vo mui
Na labour sul, na mesventi.

Bemdez e larimp hor peden,
Bep sul e kevimp oferen,
Ha moise ne jomimp re bell
Heb tóstât ouz an dol zantel.

Pa zeui hon devez diveza,
Ni ho ped, Itron Varia,
Deut da sturia hon eneo
Betek porz euruz an Envou.